



Musée
de Bretagne
lesChampsLibres

**FICHENNOÙ DAFAR
KENTAÑ DEREZ**

ANNA VREIZH

Gweladenn emren



Taolenn

| | |
|-----------------------------------|-----------|
| Ar programmoù skol | 4 |
| Fichennoù dafar | 5 |
| Geriaoueg | 11 |
| Amzeroniezh | 12 |
| Anna Vreizh er mirdi | 13 |
| Roudoù pedagogel | 22 |
| Dafar enlinenn | 24 |
| Evit mont pelloc'h | 25 |

Kavet e vo ganeoc'h en teuliad-mañ barregezhioù ha titouroù e-leizh da skoazellañ ac'hanoc'h ha se a-benn sevel ho kweladenn emren e mirdi Breizh. Kavet e vo kenkoulz ur ginnigadenn a hentad diwar-benn Anna Vreizh e mirdi Breizh. Aliañ a reomp deoc'h da gavout ho merkoù en diskouezadeg, da sellout pizh pelec'h emañ lec'hiet an traezoù er mirdi a-raok ho kweladenn gant ho klasad.

Deoc'h c'hwi da adkavout an titouroù pleustrek gant hor sturlevr a weladennoù emren, pellgargit war hor lec'hienn internet o klikañ war an ivinell «skolioù» : www.musee-bretagne.fr

Ar programmoù skol

Kelc'hiad 2

Ar pep retañ degaset d'ar sich boutin gant an danveziou kelenn liesseurt.

Skoazellañ a ra ar spisverkoù amzer da verzhout ha da gompren ar c'healioù a gendalc'h, a heuliad, a gentelezh hag a c'houdeelezh, a ziasered. Kregiñ da spisverkañ un nebeud darvoudoù war hir amzer, emouezañ ouzh gwirvoudoù ha darvoudoù an amzer dremenet hag ouzh ar c'heit hir pe hiroc'h a zisparti ac'hanomp diouti, eo ar pazennoù kentañ a-benn tostaat ouzh an amzeroniezh.

Sevel goulennoù diwar-benn ar bed : en em lec'hiañ en amzer

Gant an dachenn « Sevel goulennoù diwar-benn ar bed » e c'heller sevel tamm-ha-tamm ur sevenadur boutin, en ur gevredigezh frammet, oc'h emdreiñ en amzer-mañ-amzer hag e lec'h-mañ-lec'h.

Spisverkañ prantadoù eus istor bed ar C'hornôg hag eus istor Frañs pergen, deiziadoù a-bouez ha pennoù meur zo. Ober da gentañ gant dafar ar vro (monumantoù, savouriezh...).

Kelc'hiad 3

Ar pep retañ degaset d'ar sich boutin gant an danveziou kelenn liesseurt.

Kelenn an istor a zo da gentañ penn klask sevel ur sevenadur boutin ha reiñ da bep skoliad e lec'h en hor c'hevredigezh hag en hon amzer vremañ. Sevel a reer goulennoù diwar-benn prantadoù istor lec'h ma oa bet savet istor Frañs, ma oa bet keñveriet gant istorioù all ha lakaet e-barzh istor hir an denelezh neuze.

Istor an Arzoù

En em harpañ a ra kelenn istor an Arzoù war ar glad, lec'hel, broadel hag etrebroadel kenkoulz, dre ober gant an dafar niverel pergen. Mont a ra d'ober treugad deskadurezh arzel ha sevenadurel ar skolidi ha lakaat a ra a-gevret an darempred gant an oberennoù ha perc'hennañ ar gouiziegezhioù.

En em reteriñ en ur mirdi, ul lec'h arz pe glad

En em reteriñ en ur mirdi pe ul lec'h arz diwar lenn ha kompren an tresoù hag an titouroù. Bezañ kizidikaet ouzh simplded ar glad.

En em reteriñ en amzer : sevel spisverkoù istorel

Lec'hiañ en amzer prantadoù istor bras. Urzhiañ fedoù an eil re e-keñver ar re all ha lec'hiañ anezho e mare-mañ-mare pe e prantad-mañ-prantad. C'hoari gant ar spisverkoù istorel hag adimplijout anezho e meur a endro disheñvel.

Fichennoù dafar

Bugaleaj Anna Vreizh

Merc'h henañ dug Frañsez II ha Marc'harid Fois eo Anna ha ganet eo bet e Naoned d'ar 25 a viz Genver 1477. Ur c'hoar he deus, Isabeau (1478-1490). He zad Frañsez II zo eus an tiegezh Moñforzh a zo o ren war Vreizh abaoe 130 vloaz. Dimeziñ a ra gant Marc'harid Fois e 1471.


E 1364 eo trec'h ar re Voñforzh war an tiegezh Pentevr e brezel Hêrezh Breizh. Sinañ a reont feur-emglev Gwenrann. Re-sisaat a ra ar feur-emglev-mañ e c'hell ar re Voñforzh chom e penn Breizh keit ma vo paotred evit kaout an hêrezh, ma ra diouer anezho ez aio an tron d'an tiegezh Pentevr, ha dre astenn da roue Frañs Loeiz XI (1461-1483). Diwar-se e vefe echuet gant dizalc'hiezh dugelezh Breizh, dizalc'h diouzh rouantelezh Frañs da neuze.

Dre n'en deus ar c'houblad paotr ebet eo lakaet dizalc'hiezh Breizh en arvar. En em gannañ a raio Frañsez II e vuhez-pad evit derc'hel tron an dugelezh tra ma fell a-grenn da Loeiz XI stagañ Breizh ouzh ar rouantelezh*. Evit parraat ouzh an dra-se e vod Frañsez II Stadoù Breizh* e 1486 evit lakaat anavezout e ziv verc'h evel pennhêrezed an tron. Dont a ra dimeziñ Anna da vezañ ur c'hraf hollbouezus evit gwarantiñ dazont an dugelezh*.

E-doug he bugaleaj e kastell Naoned e vez roet da Anna ur sonn a zeskadurezh relijiel, klasel (latin, gresianeg), hag arzel. Deskiñ a ra galleg bro Naoned rak ne vez ket komzet kalz.

Dugelezh Breizh* : politikerezh dizalc'hiezh ar re Voñforzh

Dindan ren ar re Voñforzh, adalek 1364, e vez bevet gant an dugelezh ur marevezh a verz-mat hag a ziorren. Sevel a ra an dug Yann IV (1339-1399) un delladurezh d'an dugelezh hec'h-unan, lakaat skeiñ moneiz ha boulc'hañ gant ur politikerezh sevel pinvidik (kastell Brest, Dinan, Susinioù...). Kenderc'hel a ra e warlerc'hidi, Yann V ha Frañsez II gant e hunvre a zizalc'hiezh dre zerc'hel un arme. Kreñvaet e vez ar savadurioù difenn ha re-nevezet an annezioù diouzh giz ar mare (kastell Naoned). Ren a ra Frañsez II ur politikerezh diavaez emren ha skoulmañ emglevioù gant Spagn, Aostria ha Bro-Saoz evit kaout muioc'h a bouez a-geñver da Frañs. Dleout a ra an emglevioù-se a-enep Frañs bezañ kadarnaet gant dimeziñ Anna met kas a reont Frañsez II d'ar brezel foll a echu gant emgann Sant-Albin-an-Hiliber.



Skeudenn 1. Kartenn kornôg rouantelezh Frañs e 1154. Mammenn : https://fr.wikipedia.org/wiki/Portail:Duch%C3%A9_de_Bretagne, au 26/05/2020

Duchesse à 12 ans (1488-1491)

E miz Gouere 1488 eo trec'het arme Breizh, renet gant Frañsez II, gant ar bagadoù gall e emgann Sant-Albin-an-Hiliber. Diferañ a ra feur-emglev ar Werjez, sinet d'an 20 a viz Eost 1488 gant Frañsez II ha Charlez VIII, ne c'hello ket an dug dimeziñ e verc'hed hep kaout asant roue Frañs. Ur gwall daol eo ar faezhidigezh-se evit an dugelezh a seblant bezañ ret dezhi echuiñ hiviziken.

Goude marv he zad, d'an 9 a viz Gwengolo 1488, en em gav Anna e penn an dugelezh. Kurunet eo dugez e iliz-veur Sant-Pêr Roazhon d'an 10 a viz C'hwevrer 1489, hag hi 12 vloaz hepken.

Dimeziñ a ra Anna Vreizh gant Maksimilian Aostria dre c'halloudegadur, da lavaret eo hep ne vefe-eñ el lid, d'an 19 a viz Kerzu 1490 e Roazhon. Met graet eo bet an dimeziñ en enep da feur-emglev ar Werjez, hep kaout asant ar roue Charlez VIII. Hemañ, fuloret, a aloub Naoned hag a laka ar seziz war Roazhon e 1491. Evit parraat ouzh ur brezel all en em dorr Anna da eurediñ da Charlez VIII, pazenn nevez ha skarus war-du stagidigezh Breizh ouzh Frañs.

Nullañ a ra ar pab hec'h unaniezh gant Maksimilian Aostria neuze. Lidet eo an eured hep re a zistalac'h d'ar 6 a viz Kerzu 1491, e kastell Langeais, e-kichen Teurgn.



Bataille de Saint-Aubin-du-Cormier, coll. musée de Bretagne
(<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo127453>)



Poltréd eus Anna Vreizh, dast. mirdi Breizh
www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo226742

Rouanez Frañs d'he 14 vloaz (1491-1498)

Dre an unaniezh-se e teu Anna Vreizh da vezañ rouanez Frañs d'he 14 vloaz.

Yaouank eo Charles VIII (luc'hskeudenn amañ e-keñver) c'hoazh : 21 bloaz eo neuze. Anna Vreizh n'eo ket dugez ken : ar roue Charlez VIII zo o ren war Vreizh hiviziken. Gant ar gevrat dimeziñ, evit gwir, e vez prientet an unaniezh etre Breizh ha Frañs. Resisaat a ra ar gevrat e teuio Anna da vezañ dugez Breizh adarre ma varv Charlez VIII dishêr, a-bouez eurediñ d'e warlerc'hiad.

Ober a ra Anna hec'h annez e kastell Amboaz lec'h m'eo bet ganet Charlez VIII. Brazez eo ar rouanez c'hwech gwech diouzh renk met hini ebet eus he bugale ne chom bev. Mervel a ra Charlez VIII dre wall d'e 27 vloaz e 1498, diwar skeiñ e benn ouzh ur gourin-dor e Amboaz. Intañvez eo Anna Vreizh d'he 21 bloaz.

A-raok dimeziñ en-dro e adkav Anna Vreizh he zitl a zugez. Distreiñ a ra da Vreizh hag ober hec'h annez e kastell Naoned. Kemer a ra tro eus ar prantad-se evit lakaat skeiñ ur moneiz aour diwar he fatrom. War ar moneiz-se a reer «Ar Gadorienn» anezhañ, eo-hi skeudennet gant meurbed war an tron (amañ dindan). Un ober politikel kreñv-kenañ eo, a zo d'ar roueed hepken sañset.



Poltréd eus Charlez VIII, dast. mirdi Breizh
www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo226848

« Ar merc'hed, ar rouanezed hag ar galloud »

«Da vare ar roueed e veze sellet ouzh ar merc'hed evel tud izeloc'h, dezho ul lec'h a eilrenk er gevredigezh. N'o doa ket an hevelep gwirioù hag ar baotred. O zad a ziba-be ur gwaz evito pe a gase anezho d'ar gouent. Dleout e oa dezho sentiñ ouzh o gwaz en doa perzh holl warno.

E Frañs, evit dont da vezañ rouanez e veze ret dimeziñ gant ur roue. Ur seurt dimeziñ ne oa ket un afer a garantez met an digarez da skoulmañ emglevioù* gant un tiegezh a-bouez, hini un aotrou galloudus pe hini roue ur vro all, en doare da gaout e skoazell pe douaroù. Ar rouanezed n'o doa tamm galloud ebet. Met ober a raent war-dro desevel o bugale, an danvez-roueed eta hag un tamm levezon o doa warno neuze. Ma varve ar roue pa oa e vab bugel c'hoazh e veze renet ar rouantelezh gant ar rouanez evit ur mare (ar rejañs a vez graet eus kement-se).»

Sophie Le Callenec, tennad eus an dornlevr «Istor, douaroniezh, KMK», KE1, emb. Magellan, pp. 56-57



Kadorienn eus Anna Vreizh, dast. mirdi Breizh
<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo217037>

Rouanez evit an eil gwech d'he 22 vloaz (1499-1514)

Dre m'eo dishêr e rank Anna eurediñ da warlerc'hiad he gwaz tremenet, hervez gerioù ar gevrat dimeziñ. Kenderv Charlez VIII an hini eo, an dug Loeiz Orleañs a zeu da vezañ roue dindan an titl a Loeiz XII.

Lidet eo an eured e miz Genver 1499 e kastell Naoned. Kurunet rouanez Frañs eo Anna adarre. Kevraouiñ a ra gwelloc'h he c'hevrat dimeziñ an taol-mañ, war veur a boent :

- Delc'her a ra he zitl a zugez, ha gant-se e c'hell gouarn ha dastum korvoderioù Breizh.
- Hec'h eil bugel en do Breizh da hêrezh.
- Ma varv Anna e vo meret Breizh gant Loeiz XII met distreiñ a raio d'an hêred wir pa varvo-eñ.
- Dalc'het e vez da gustumoù zo evel gwir breujoù Breizh pe reizhiad an telloù (ar gabel, tell war an holen).

Gant an diarbennoù-se eo diwallet Breizh gant Anna diouzh ar stagidigezh ouzh Frañs.



Medalenn, dast. mirdi Breizh
<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo115116>

An erminig, ardamez Anna Vreizh

Liammet eo an erminig ouzh Breizh evel al lili ouzh rouantelezh Frañs. Da gentañ penn e kenglot erminig an ardamez gant feur al loen ma touble an noblañs hag ar reizhaouerien a renk uhel o dilhad lid ganti. Arouez a c'hlanded divezel eo an erminig. Hervez ur vojenn he dije gwelet Anna Vreizh, e-kerzh ur chaseadeg, un erminig a oa bet gwelloc'h gantañ perisañ dre zent ul louarn kentoc'h eget louzañ e vlevenn wenn er fank. Diwar-se e vije ganet he ger-ardamez «kentoc'h mervel eget bezañ saotret.» Met bez' e oa eus an ardamez pell a-raok Anna, pa oa bet krouet gant Pêr Dreux e 1202 hag implijet evel ardamez dugelezh Breizh gant an dug Yann III. Skeudenn : Arouez erminig




Mesenez ha lennegourez

Dont a ra Anna Vreizh en oad e deroù an Azginivelezh. Merket eo ar mare-se, ma oa an humanouriezh o vleuniañ, gant kavadennoù teknikel meur, evel ar moullerezh gant Gutenberg e-tro 1454 ; pe douaroniel, gant Kristof Koulm, kavadenner Amerika e 1492.

Perzh eo Anna el lusk-se ha dont a ra da vezañ ur vesenez* a-bouez. Emañ-hi o vont da skorañ an arzourien a bep diskiblezh : livouriezh, enliverezh*, savouriezh, sonerezh, arzoù kinklañ...

He levraoueg dezhi hec'h-unan a oa enni un niver bras a levrioù diwar-benn ar relijion, an istor pe an divezegezh. Perzh e oa bet hec'h urzhiadoù stank, evel hec'h eurioù pe al levr «Buhez ar merc'hed brudet», urzhiadet da Antoine Dufour, e degas arz an Azginivelezh italian e Frañs hag e Breizh.

Naoned, e kastell Duged Breizh, al loggiaoù, dast. mirdi Breizh
www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo214763



Marv Anna Vreizh

Mervel a ra Anna Vreizh e kastell Bleaz d'an 9 a viz Genver 1514, d'an oad a 37 vloaz. Evel rouanez Frañs eo douaret he c'horf e penniliz Sant-Denez, beredeg ar roueed.

En enep eo bet lakaet he c'halon e iliz Garmez Naoned, e-kichen bez he zud. Gellet a ra kement-se diskouez he c'harantez ouzh Breizh moarvat met ur c'hustum brientinel eo a-raok pep tra. Emañ e-barzh ur skrin aour e stumm ur galon, urzhiadet gant Loeiz XII pe Anna hec'h-unan. Ar bennoberenn orfebrezh-mañ (amañ e-keñver), diskouezet e 2014 e mirdi Breizh, a zo miret er mirdi Dobrée e Naoned hiziv an deiz.

Mervel a ra Loeiz XII bloaz war-lerc'h e 1515.



Diskouezadeg Anna he c'halon Breizh
CC-BY-SA Alain Amet
(<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMo6686>)

Stagidigezh Breizh ouzh Frañs

Renkañ a ra Loeiz XII dimeziñ e verc'h Klaoda (1499-1524) gant roue Frañs da zont, Frañsez Iañ. Mervel a ra Anna un nebeud mizioù a-raok an dimeziñ-se. Gant Frañsez Iañ eo bet staget da vat hag ent-ofisiel Breizh ouzh Frañs e 1532 dre un edit sinet e Gwened ha gwirieket gant Stadoù Breizh*. Rak-se ne welo biken Anna Vreizh diwezh an dugelezh a zeu da vezañ ur proviñs gall meret gant ur gouarnour.

Stagidigezh Breizh ouzh Frañs : un danvez tarzhus ?

Kemenn a ra ar skritell-mañ ar festoù aozet e Gwened e miz Eost 1932 da-geñver pevar c'hant vloaz unaniezh dugelezh Breizh ouzh ar rouantelezh c'hall. Gant Frañs, personaet, eo gronnet Breizh, personaet ivez, en he mantell flourdilizek. Er c'horn uhel kleiz e weler armoù Kêr Gwened.

Tost eo an doare m'eo bet pledet gant an dodenn ouzh hini ar monumant savet gant Jean Boucher e 1911 evit ti-kêr Roazhon. A-hend-all eo bet plastiket ar monumant-se gant an emrenelourien vreizhat e 1932.

Unaniezh Frañs Breizh 1532-1932, dast. mirdi Breizh
<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo289944>



Geriaoueg

Alliance : accord, union entre des personnes, des familles ou des pays.

Emglev : kevredadur, unaniezh etre tud, tiegezhioù pe broioù.

Kadorienn : Ger o tont eus al latin «Cathedra» talvezout a ra kement a gador uhel he c'hein an eskop eget ar pezhioù moneiz o tiskouez ar roue azezet war ar gador-mañ

Kontelezh, dugelezh : tiriadoù eus rouantelezh Frañs a zo aotrouien c'halloudus perc'henn warno, ar c'hont war ar gontelezh, an dug war an dugelezh.

Lez : Hollad an uhelidi pe lesaourien o vevañ en-dro d'ar roue.

Enliverezh : Arz livañ pe tresañ gant an dorn evit kinklañ pe skeudenniñ un destenn, un dornskrid peurvuiañ.

Stadoù meur : kannaded ar rouantelezh. Bodadeg, diwar intrudu ar roue, kannaded 3 urzh ar rouantelezh : ar gloer, an noblañs hag an trede stad.

Stadoù Breizh : pe Stadoù dibar Breizh, da lavaret eo Breujoù broadel Breizh dindan ren duged Breizh. Galvet eo Stadoù Breizh gant ar roue ha sezañ a reont bep daou vloaz en ul lec'h disheñvel. Gelllet a reont bezañ galvet dreistordinal evit dont da sezañ er Stadoù meur a vod holl Stadoù dibar ar rouantelezh.

Hêr, hêrez : den en deus madoù dre hêrezh, warlerc'hiad.

Moullerezh : Hollad an teknikoù a ro an tu da fardañ ur c'hementad bras a levrioù.

Dornskrid : levr skrivet gant an dorn a-raok ma oa bet ijinet ar moullerezh. Hiziv an deiz e reer dornskrid eus ul levr a zo da vezañ moulllet.

Monarkiezh : galloud embreget gant un den hepken, ar monark pe rieg.

Mesen : den a ro ur skoazell arc'hant d'un arzour dre urzhiadiñ oberennoù dezhañ.

Rejañs : ar fed da ren ur rouantelezh pa vez re yaouank ar roue evit en ober e-unan.

Roue : den a embreg ar galloud souveren. Ar roueed zo monarked a zo ar galloud en o dalc'h o buhez-pad dre hêrezh. Gwreg ar roue eo ar rouanez.

Rouantelezh : tiriad gouarnet gant ur roue.

Rieg : penn ar roueelezh, en e zalc'h emañ ar galloud uhelañ.

Sujed : den a zo dindan aotrouniezh ar roue. Da vare ar roueed e oa holl annezidi rouantelezh Frañs sujidi ar roue.

Amzeroniezh

1477 - d'ar 25 a viz Genver : ganedigezh Anna Vreizh e Naoned

1485 - Lakaat a ra Frañsez II da anavezout e verc'hed evel hêrezed an dugelezh gant Stadoù Breizh

1488 - d'an 28 a viz Gouere : faezhidigezh ar Vretoned e Sant-Albin-an-Hiliber a-enep Charlez VIII hag e arme

1488 - d'an 9 a viz Gwengolo : marv an dug Frañsez II, tad Anna Vreizh

1489 - d'an 10 a viz C'hwevrer : sakret eo Anna da zugez Breizh e Roazhon

1490 - d'an 19 a viz Kerzu : dimeziñ dre c'halloudegadur gant Maksimilian Aostria

1491 - d'ar 6 a viz Kerzu : dimeziñ gant Charlez VIII, e Langeais

1492 - d'an 8 a viz C'hwevrer : sakret eo Anna da rouanez Frañs e Sant-Denez

1498 - d'ar 7 a viz Ebrel : marv Charlez VIII, dre wall, e Amboaz

1499 - d'an 8 a viz Genver : dimeziñ Loeiz XII gant Anna Vreizh e Naoned

1499 - d'an 13 a viz Here : ganedigezh o merc'h Klaoda

1514 - d'an 9 a viz Genver : marv Anna Vreizh e Bleaz

d'ar 16 a viz C'hwevrer : douaridigezh e Sant-Denez

d'an 19 a viz Meurzh : lakaet eo kalon Anna Vreizh e bez he zad

d'an 18 a viz Mae : dimeziñ Klaoda gant Frañsez 1^{añ} e Saint-Germain-en-Laye

1515 - d'ar 1^{añ} a viz Genver : mervel a ra Loeiz XII.

1532 - stagidigezh Breizh ouzh Frañs dre edit unaniezh Frañsez 1^{añ} e Gwened

Anna Vreizh er mirdi


Diskouezadeg pad « Hollved eo Breizh »



Ur mirdi a istor hag a gevredigezh eo Mirdi Breizh a zo evel un nor zedennus evit mont d'ober anaoudegezh gant istor ar rannvro-mañ, kadarn hec'h identelezh. Taolenniñ a ra istor Breizh eus an orinoù d'an amzer hiziv ha kinnig a ra dibarder un tiriad en e vent hollvedel.

Emañ emdroadur an doareoù bevañ e Breizh e kreiz hentad an diskouezadeg pad. Imbourc'hiñ a ra ar weladennerien kemmoù istorel, ekonomikel ha sokial an tiriad dre ur vordilh a draezennoù pemdez, a zilhad, a gartennoù-post, a skritelloù, a engravadurioù...

Dre an dastumadoù diskouezet hag an hentad emren-mañ e vez kinniget deoc'h mont gant ho skolidi war roudoù Anna Vreizh, penn meur istor Frañs ha Breizh. Chom a ra c'hoazh hiziv an deiz penn istorel muiañ-karet ar Vretoned.



Mirdi Breizh diskouezadeg Hollved eo Breizh, Alain Amet CC-BY-SA mirdi Breizh



Mirdi Breizh diskouezadeg Hollved eo Breizh, Alain Amet CC-BY-SA mirdi Breizh

1

Kadorienn eus Anna Vreizh - 1498, Aour

Azezet a-dal emañ Anna Vreizh, «gant meurded» ha gwisket eo gant ur sae hag ur vantell brizhellet gant erminigoù (dugelezh Breizh) ha flourdiliz (Rouantelezh Frañs). Ganti en he dorn kleiz ez eus ur vazh-roue, ur c'hleze en he dorn dehou ha gwisket eo he fenn gant ur gurunenn. Enskrivet ez eus un deiziad ivez : 1498.

E 1498-1499 e tiviz Anna, dugez Breizh ha rouanez Frañs, intañvez ar roue Charlez VIII, hag a-raok he dimeziñ gant e warlerc'hiad Loeiz XII, skeiñ ur moneiz nevez a-benn degas koun eus dizalc'hiezh dugelezh Breizh. Testeniet eo kement-se gant an enskrivadur latin war erien ar pezhioù moneiz : «Anna, dre c'hras Doue, rouanez ar C'hallaoued ha dugez Breizh». Brient ar roueed (hag ar wazed) eo koulskoude ! Ne voe skoet nemet un nebeud skouerennoù eus ar moneiz-se, ar pezh a greñva e bouez arouezel : gant ar moneiz-se e kadarn Anna hec'h aotrouniezh ha skignañ a ra he skeudenn.



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo217037>

2

Delwenn en he gourvez eus Jacques pe eus e vreur Jean Guibé – 16vet kantved, marbr

Dalc'het o doa Jacques ha Jean Guibé kargoù-arme uhel e dugelezh Breizh. Kabiten tiegezh ar Rouanez e oa Jacques e-tro 1508. An tiegezh-se a oa leizh a dud-nes ouzh Anna Vreizh oc'h ober anezhañ, Bretoned pergen..

Reiñ a ra ur seurt kizelladur, delwenn-gañ eus un den en e c'hourvez, testeni eus galoud ar familh-se. An den, gwisket gant e zilhad soudard, a zo e gleze hag e ardamezioù en-dro dezhañ. Gant tri ael eo savet an dorchenn m'emañ e benn warni tra m'emañ ouzh e dreid ul leon war evezh, arouez nerzh ha kalon. Diwar implij ar marbr, an doare m'eo fichet ar blev, an aket kemeret gant neuz ar gwadennoù hag an tok, e vez diskouezet levezon an arz italian e lez Breizh.




<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo207503>

3

Gwel diabarzh eus bodadeg Stadoù Breizh - Antoine Henon - 1764 - Stamp

Freuzet e oa bet Stadoù Breizh e 1488 da heul faezhidigezh ar Vretoned e Sant-Albin-an-Hiliber hag adsavet dek vloaz war-lerc'h gant Anna Vreizh. Padout a raint goude he marv ha goude ar stagidigezh ouzh Frañs e 1532. Er Grennamzer e c'helle kannaded kêrioù Breizh en em vodañ en un doare dreistordinal evel ma voe graet e 1352 e Dinan.

Skeudenniñ a ra an engravadur-mañ Stadoù Breizh d'ar marevezh modern : ur vodadeg wazed o tivizout e sal veur kouent ar Jakobined e Naoned. Gant tost da 900 kannad, a-enep 60 evit ar gloer ha 42 evit an trede stad eo muianiverek an noblañs (a-gleiz war ar stamp). Bodet e vez tri urzh ar Renad Kozh evit gwareziñ brientoù kemedel an dugelezh kozh. Hag en enep d'ur soñj boutin ne oa ket bet biskoazh digousted an hentoù tizh e-barzh ar brientoù-se, ne zle netra da Anna Vreizh neuze !



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo113750>

4 Kartenn Breizh rannet e 5 departamant - 1799-1800 - Engravadur dre engraver ha gwalc'hlivadur

Pa oa bet krouet an departamantoù ne oa ket aet proviñs Breizh tre diwar-wel rak bevennoù velestradurel ar rannvro a glot gant trolinenoù dugelezh kozh Anna Vreizh.

Diskouez a ra ar gartenn velestradurel-mañ ar pastellañ bro eus 1789 dre zepartamantoù, kantoniou ha distrigoù. Breizh eo ar rannvro nemeti a zalc'h he harzoù kozh. Pemp departamant, en o zouez al Liger-Atlantel a vremañ, az a d'ober Breizh neuze. N'eo nemet e 1941, war ziviz gouarnamant Vichy, m'eo bet lakaet al Liger-Atlantel e Broioù al Liger, o c'henel div Vreizh : Breizh istorel ha Breizh velestradurel.



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo114125>

5 Skritell «Deuit e Breizh» - André Galland, deroù an 20^{vet} kantved

War ar skritell douristel-mañ eo gwisket Anna Vreizh gant dilhad ar Grennamzer ha dindani ez eus ur marc'h goloet e gein gant ur gwriad glas hag alaouret. An dugez a zo aes da anavezout dre he c'hoef ha dre ar feur erminig a vord he mantell. Ober a ra ar skritell dave da «dro Breizh» graet gant Anna e 1505. Gweladenniñ a ra kêrioù pennañ he dugelezh ha lec'hioù pirc'hirinañ Breizh. Dre c'hoari gant ar stereotipoù e ra ar bruderezh gant un harozez istorel hag arouezel evit lakaat atou-doù Breizh en a-raok d'ur mare ma vez ar beajoù tren hag an touristerezh o tiorren.

Dre implijout skeudenn an dugez pell goude he marv e vez kreñvaet mojenn Anna Vreizh.



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo280483>

6

«An dugez Anna hag he botoù-koad» Kanaouenn war follenn zistag, Roazhon, 1880

Skignet e vez an darvoudoù liesseurt gant ar c'hanaouennoù pobl moulllet, gwerzhed dre follenn pe deskad, hag a zo perzh e sevel ur vemor a-stroll. Gant ar follenn zistag-mañ e vez treuzkaset skeudenn Anna an dugez vat, itron nobl he botoù-koad.

Pell emamp diouzh buhez pemdez Anna Vreizh el Lez ! Kanet e vez ar ganaouenn-mañ war an hevelep ton hag «O tremen dre Loren», met testenikaet eo an orin breizhat anezhi gant ur stumm koshoc'h «O tistreiñ eus Roazhon»

LA DUCHESSE ANNE ET SES SABOTS
(Ronde paysanne ancienne)
Recueillie et publiée pour la première fois en 1880, par M. Adolphe Ollivier

Cv. tait An. de Bre. ta. gne. a. se. des. sa. bots. Cv. tait
An. de Bre. ta. gne. a. se. des. sa. bots. An. de Bre. ta. gne. a. se. des. sa. bots.
Cv. tait An. de Bre. ta. gne. a. se. des. sa. bots. Cv. tait

C'était Anne de Bretagne
Avec des sabots
Revenant de ses domaines
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

Revenant de ses domaines
Avec des sabots
Entourée de châtelaines
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

Entourée de châtelaines
Avec des sabots
Voilà qu'aux portes de Rennes
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

Voilà qu'aux portes de Rennes
Avec des sabots
L'on vit trois beaux capitaines
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

L'on vit trois beaux capitaines
Avec des sabots
Offrir à leur Souveraine
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

Offrir à leur Souveraine
Avec des sabots
Un joli pied de verveine
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

Un joli pied de verveine
Avec des sabots
S'il fleurit, tu seras reine
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

S'il fleurit tu seras reine
Avec des sabots
Elle a fleuri la verveine
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

Elle a fleuri la verveine
Avec des sabots
Anne de France fut reine
En sabots mililitontaine
Ah, ah, ah
Vivent les sabots de bois !

(Publiée avec l'autorisation de l'auteur. — Tous droits réservés)

<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo278034>

7

Boutailh vier Dugez Anna - Breserezh Lancelot Roz-Sant-Andrev, 2013

War an dikedenn eo hanterseudenet Anna Vreizh, rouanez Frañs ha dugez Breizh, e-barzh ur skeudennig flourdilizet hag erminiget ar goueled anezhi. Gant krouiñ ar bier Dugez Anna e 1996 e oa bet dibabet gant breserezh Lancelot penn brudetañ istor Breizh.

Ingal e vez implijet skeudenn arouezel Anna Vreizh evit palioù kenwerzhel. Perzh eo kement-se e brud vat ar penn bras met e berzh ar produ ivez ! Bonedoù Ruz, Erminig Gwenn, Telenn Du, ar braz eus ar bieroù produet gant ar vreserezh Lancelot a ra dave da Vreizh istorel pe mojennel. Ober a ra he skeudenn verk gant identelezh sevenadurel kreñv ar rannvro neuze.



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo138746>

8

Anna Vreizh – Pladenn 33 zro

En oberenn-mañ enrollet war 33 zro ez eus bet savet emzivizoù diwar-benn buhez Anna Vreizh ha roet korf dezhi gant komedianed. Sevenet eo bet ar grouadenn c'hoariva ha sonerezh-mañ gant Ronan Caerleon hag e vreur Herry Caouissin, anavezet o daou evit bezañ stourmerien ha difennerien sevenadur Breizh.

Rouanez ankouaet, lakaet da arouez stourm Breizh ouzh Frañs en 19vet kantved, gwelet gant istorourien zo a-wechoù evel ur rouanez plaen ha nebeut a levezon ganti, Anna Vreizh a voe kemeret hag implijet he skeudenn meur a wech. Hiziv an deiz e vez kendalc'het kentoc'h skeudenn ur rouanez kurius a zegasas, a-raok Frañsez lañ, sevenadur an Azginivelezh el Lez en ur chom feal ouzh he dugelezh.



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo273120>

9

Bilhed 5 lur – Bank Broadel Breizh, 1992

Ar bilhed 5 lur-mañ, diwar patrom Anna Vreizh, a ra adarre gant he foltred brudetañ, graet e 1508 gant Jean Bourdichon, evel war ar voutailh vier hag ar bladenn.

Unanenn gontañ kozh dugelezh Breizh eo al lur. Addont a ra war-wel adalek 1992 dindan stumm eizh bilhed da geñver gouel ar brezhoneg e Speied (Penn-ar-Bed). E-pad daou zevezh e talv al lur kement ha moneiz eskemm. E burevioù eskemm e c'helled eskemm Lurioù breizhat ouzh lurioù gall, dollaroù, lurioù saoz, markoù, ul lur o talvezout kement hag ul lur gall. Evel ma voe skoet moneiz gant Anna Vreizh e-kerzh he beaj verr ez eus bet kinniget gant Bank Broadel Breizh ur frankiz ekonomikel d'ar festivalourien dre vonañ bilhedoù.



<http://www.collections.musee-bretagne.fr/ark:/83011/FLMjo122012>

Roudoù pedagogel

Broudañ a reomp ar gelennerien da vont gant un difrae kroaziañ an dodennoù dre lakaat war-sav ur raktres deska-durezh arzel ha sevenadurel war vloavezh hag a yelo pelloc'h eget ober anaoudegezh eeun gant Anna Vreizh evel penn istorel.

Kelc'hiad 2

Palioù :

- Kregiñ da spisverkañ un nebeud darvoudoù war hir amzer, emouezañ ouzh gwirvoudoù ha darvoudoù an amzer dremenet
- Sevel ur sevenadur boutin gwriziennet en tiriad
- Anavezout deiziadoù pennañ zo dre ur penn istorel meur oc'h ober da gentañ gant dafar ar vro
- Lec'hiañ an takadoù studiet war ur gartenn, spislec'hiañ e rannvro ha Frañs
- Emouezañ ouzh emdroadur an doareoù bevañ

Roudoù :

1-Dizoleiñ ha deskrivañ ur poltred eus Anna Vreizh*

Lakaat anat perzhioù dibar ur marevezh (ar Grennamzer) diwar skeudennadurioù ar skolidi.

Ober gant ar geriadur evit klask gerioù evel : dug, dugelezh, dugez / roue, rouanez / rouantelezh, roueelezh

2-Kinnig kerent Anna Vreizh ha sevel deroù gwezenn he c'herentiezh

Kinnig ur gartenn* eus dugelezh Breizh ha lec'hiañ ar c'hêrioù bras (Roazhon, Naoned, Brest...)

Lec'hiañ dugelezh Breizh e-keñver ar peurrest eus ar rouantelezh

3-Lakaat e kerz ar skolidi teulioù ma c'hellint sevel kartenn-anv Anna Vreizh ganto (anv, deiziadoù, lec'h ganedigezh, kerent, kargoù dalc'het, oad, techoù mat, perzhioù) ds: miniadurenn eus Anna Vreizh, medalenn, deskrivadell, arouezioù (flourdiliz, brizhenn) *

4-Anavezout dimeziñ lerc'h-ouzh-lerc'h Anna Vreizh hag he lec'hioù annez disheñvel (kastell Amboaz, kastell Bleaz...)

Kompren penaos e teuer da vezañ rouanez ha kregiñ da intent dalc'hoù an emglevioù

5-Les enfants d'Anne de Bretagne* : construire la suite de la généalogie

Présenter une carte après 1532 : comprendre les modifications du rattachement de la Bretagne à la France

6-Petra a c'hoarvez er memes koulz ? Lakaat e kerz ar skolidi teulioù diwar-benn Gutenberg, ar moullerezh, an dornskridoù, an enliverezh*, kavadennoù meur Kristof Koulm, oberennoù Leonardo da Vinci en Italia.

7-Anna Vreizh hiziv an deiz* : roudoù an Istor en hon endro tost (traezennoù a vremañ diwar patrom Anna Vreizh, met ivez ur boulouard, ur skolaj e Roazhon...)

* oberennoù e liamm e Mirdi Breizh

Kelc'hiad 3

Palioù :

- Lakaat en a-raok perzh ar merc'hed en istor
- Anavezout an dalc'hoù galloud ha mestroniañ an tiriad
- Kompren penaos e oa bet savet rouantelezh Frañs
- Merzhout an darempred etre galloud ar roue hag an arzoù (kinnig ur c'hastell da skouer) koulz ha dilec'hiañ al lez a gastell da gastell
- Lakaat da gompren petra eo ur vonarkiezh
- Spisverkoù amzer pennañ da sevel : diwezh ar Grennamzer ha deroù an Amzer Vodern, an Azginivelezh

Roudoù :

1-Deskrivañ ur poltred eus Anna Vreizh ha sevel he c'hartenn-anv

Lec'hiañ ar marevezh istor war ur frizenn

2-Penaos e teuio Anna Vreizh da vezañ un elfenn greiz evit gwarantiañ dazont an dugelezh ? Dazont rouantelezh Frañs ? Dielfennañ teulioù ha sevel martezeadennoù

3-Anavezout dimeziñ lerc'h-ouzh-lerc'h Anna Vreizh dre deulioù a bep seurt.

Lec'hiañ war ur gartenn al lec'hioù annez lerc'h-ouzh-lerc'h ha sevel un hentad war ur gartenn zouaroniel.

4-Sevel un daolenn geñveriañ etre ar merc'hed da vare ar roueed hag ar merc'hed en amzer hiziv (o lec'h er gevredigezh, o gwirioù...)

5-dielfennañ oberennoù ha teulioù a bep seurt a-benn kompren penaos e tiazez Anna Vreizh he galloud evel rouanez : studiañ ur c'hastell roueel (Amboaz, Bleaz, Naoned), ur pezh moneiz (ar gadorienn), un dornskrid enlivet, ardamezioù (flourdiliz, erminig)

6-Keñveriañ kartenn rouantelezh Frañs a-raok ha goude 1532

* oberennoù e liamm e Mirdi Breizh

Dafar enlinenn

Porched an dastumadoù

Lakaet e vez e kerz gant mirdi Breizh e zastumadoù, videoioù ha kelaouaou dre luc'hskeudennoù. Gellet a ra kelennerien ha skolidi kavout enno traezennoù ha teulskeudennoù a glot gant ar programmoù skol. Gellet a reer adimplijout frank ar restroù niverel hep goulenn un aotre diagent. Gellet a reer sevel an abadennoù istor ha douaroniezh en-dro d'an teulioù miret er mirdi neuze. kinniget e vez paneradoù tematek a-zalc'h ouzh an darvoudoù a vremañ ha gellet a ra pep hini krouiñ ur c'hont hag e baneradoù dezhañ e-unan diwar an notennigoù.

www.collections.musee-bretagne.fr



Tablezennoù Roazhon

Reiñ a ra «Tablezennoù Roazhon» digor da c'hlad niverelaet Levraoueg Roazhon Meurgêr. Ganto e c'heller follennata levrioù, dornskridoù, kazetennoù ha ke-laouennoù diwar-benn Breizh ha sellet ouzh skeudennoù e-leizh, eus ar Grennamzer betek an amzer a vremañ. Strollañ a reont ouzhpenn 4000 teul kozh pe modern.

www.tablettes-rennaises.fr



Dornskrid enlivet gant Pierre Choque

Taolenniñ a ra an dornskrid enlivet-mañ kounlid marv Anna Vreizh e 1514, ur c'hounlid hag a badas 40 devezh. Mervel a ra ar rouanez Anna, dugez Breizh, e kastell Bleaz d'an 9 a viz Genver 1514 d'an oad a 37 vloaz.

Meurdezus ha koustus-dreist eo an obidoù. C'hoarvezout a reont e tri fred : al lidoù e kastell Bleaz, an arsavioù hed-ha-hed an hent eus Bleaz da Itron Varia Pariz (eus an 3 d'ar 14 a viz C'hwevrer), hag an douaridigezh e Sant-Denez da heul (d'ar 15 a viz C'hwevrer).

Enskrivet e oa bet un deskrivadur eus al lidoù-se gant he Harod armoù, Pierre Choque, en un dornskrid urzhiadet gant Loeiz XII : Kounlidoù ha kemenn eus marv Anna Vreizh. Miret ez eus bet ouzhpenn 35 eilad eus an dornskrid-mañ bravaet gant kaerlizherennoù.

Niverelaet penn da benn eo bet an dornskrid enlivet-mañ a zo miret e levraoueg Roazhon Meurgêr. Gellet a reer sellet outañ war al lec'h (6vet estaj) pe war lec'hienn Tablezennoù Roazhon.

www.tablettes-rennaises.fr/app/photopro.sk/rennes/detail?docid=57718#sessionhistory-ready



Evit mont pelloc'h

An dafar da furchal ennañ

Levrlennadur

Levrioù dre vras

- Elégoët Louis, Breizh, un istor, KRDK Breizh, 2000
- Le Page Dominique, Anna Vreizh, dugez ha rouanez, 2018
- L'Hoër Claire, Anna Vreizh, dugez ha rouanez Frañs, 2019

Kelaouenn Yaouankidi

- Istor Yaouankidi, Anna Vreizh, dugez ha div wech rouanez Frañs, n°31, miz Even 2014

Bandenn treset

- Tchao Cédric, Anna Vreizh, itrikoù er c'hastell, 2019

Lennegezh yaouankidi

- Bouchié Pascale, istor gwir Colin, servijour Anna Vreizh, 2016
- De la Bretesche Geneviève, Kastell Anna Vreizh, 2009 (kelc'hiad 2 ha 3)
- De Lasa Catherine, Anna Vreizh, dugez disuj, 2015 (kelc'hiad 3)
- Féray Yveline, Anna Vreizh, rouanez he zeir c'hurunenn, 2015 (kelc'hiad 3)
- Wennagel Bruno, Anna Vreizh, Pebezh istor, 2015

Lec'hiennlennadur

https://fr.wikimini.org/wiki/Anne_de_Bretagne

https://fr.vikidia.org/wiki/Anne_de_Bretagne



Da weladenniñ

Kastell Amboaz

<https://www.chateau-amboise.com/fr/page-histoire>

Kastell Bleaz

<https://www.chateaublois.fr/2106-les-personnages-illustrés.htm>

Kastell Langeais

<https://chateau-de-langeais.com/preparez-visite-groupes-scolaires/#dossiers-pedagogiques>


Kastell Naoned

http://www.chateaublois.fr/sites/chateau-nantes.fr/files/laissezvousconcernantes_anne_bretagne.pdf

Video


Anna Vreizh, Pebezh istor - TV5 Monde

www.youtube.com/watch?v=rmyWToVe87k



Sevel notennoù

A series of 20 horizontal dotted lines for writing notes.



lesChampsLibres

Musée de Bretagne – Bibliothèque – Espace des sciences

Mirdi Breizh - Ar Maeziou Frank

10 bali ar Gevredidi - 35000 ROAZHON

Darempred hanterouriezh : Laurine Fabre, kelennerz-eilerez an DAAC
evit ar 1añ derez (l.fabre@leschampslibres.fr)
pe mediation.musee-bretagne@leschampslibres.fr

Mirout : 02 23 40 66 00 a Lun da Wener adalek 9e betek 5e gk

www.musee-bretagne.fr